

HO MAMM !



Ha pa oac'h bi - han, pao - tred, o, Ha pa oac'h bi -



han, N'ho peus ket kle - vet, pao - tred, o,



N'ho peus ket kle - vet ho mamm d'an noz, o



ka - na d'eoac'h, Ho mamm, d'an noz, o ka - nan deoac'h.



Ha pa oac'h bi - han, pao - tred, o, Ha pa oac'h bi - han.

2

War he chapeled, pao tred, o !

War he chapeled,

N'oc'h eus ket gwelet, pao tred, o !

N'oc'h eus ket gwelet

Ho mamm o pedi evidoc'h ?

Ho mamm o pedi evidoc'h ?

War he chapeled, pao tred, o !

War he chapeled.

3

E tal ho kavel, pao tred, o !

E tal ho kavel,

N'oc'h eus ket gwelet, pao tred, o !

N'oc'h eus ket gwelet

Ho mamm o neza evidoc'h ?

Ho mamm o neza evidoc'h ?

E tal ho kavel, pao tred, o !

E tal ho kavel,

4

E korn an aoled, pao tred, o !

E korn an aoled,

N'oc'h eus ket gwelet, pao tred, o !

N'oc'h eus ket gwelet

Lagad ho mamm troet warnoc'h ?

Lagad ho mamm troet warnoc'h ?

E korn an aoled, pao tred, o !

E korn an aoled,

5

A zaerou ho mamm, pao tred, o !

A zaerou ho mamm,

Dalc'hit sonj bepred, pao tred, o !

Dalc'hit sonj bepred,

Ne 'z eus netra krenfoc'h er bed,

Ne 'z eus netra krenfoc'h er bed,

'Get daerou eur vamm, pao tred, o

Get daerou eur vamm,

6

Tremen 'ra pep tra, pao tred, o !

Tremen ra pep tra,

An dud hag ar roz, pao tred, o !

An dud hag ar roz.

Met bet 'z eus traou a bad bepred,

Met bet 'z eus traou a bad bepred,

'Vel ar baradoz, pao tred, o !

'Vel ar baradoz !

J. LE BAYON.